

**Heuliad prezegennoù aozet get Skol-Veur Breizh hag Emglev Bro an Oriant,
ar Gouel Emvod ar Gelted, Ensavadur Sevenadurel Breizh ha CCI**

Digoust d’an holl a-vat keit ha ma chom lec’h

**Ag ar Lun d’ar 7 d’ar Gwener 11 a viz Eost 2017
Sal Ducassou, Kambr Kenwerzh, 21 Kae an Indez, An Oriant**

Programm :

Lun 7 a viz Eost

15 e. – Arnaud Bastianelli (dileuriad Ofis an douristelezh Bro-Skos, Market Manager South Europe, VisitScotland), ha **David Brew** (dileuriad Creative Scotland).



Digoradur a-ziàr benn Bro-Skos : Gouelioù, gouezeleg ha touristelezh sevenadurel. Àr e hengounoù hag en e Istoer e kemer harp sevenadur Bro-Skos bevet ha lakaet a-wel hiriv an deiz. A feur ar c’hantvedoù eo bet levezonet ar vro pinvidig ha levezonus-mañ dre an arzoù, ar sonerezh hag ar yezh. Ur brezegenn evit dizoloiñ munudoù diorren Bro-Skos a-vremañ dre ar gouezeleg, ar sonerezh hag an douristelezh sevenadurel.

17 e. – Marie Coulon, Arnaud Bastianelli et Julien Manuguerra (dileuridi VisitScotland, Ofis broadel an douristelezh e Bro-Skos)



Bro-Skos – gwrizioù, sevenadur ha modernelezh. Kantvedoù a liammoù, stourmoù hag a hengounoù a zo bet é stummiñ ar vro, ur wir binvidigezh evit an amzer a-vremañ. Bep blez e vez desachet touristed ag ar bed a-bezh, daet da soubiñ en istoer hag er mojennoù, ha daet da arvestiñ doc’h ar lec’hioù bamus-se. Ur vro a-nevez eo ivez Bro-Skos, àr-ziorren, fier ag e identelezhioù – ha prest da ranniñ anezhe. Ar sonerezh, ar gouleioù, an arzoù hag an artizanelezh a zo an dañveziou splannañ evit hen ober. Ag ar Bikted betek pennoù ar c’hlannoù, a strolladur ar Rouantelezh-Unanet betek hiriv an deiz : penaos emañ daet da vout Bro-Skos ur vro ken modern ha degemerus ? Gwriziad, kultur ha modernelezh : Razh ar pezh a c’hell Bro-Skoz kinnig d’ar bed ha d’ar re a za d’he bizitiñ.

Meurzh 8 a viz Eost

15 e. – Andrew Hunter (Kanour ha klaskour àr ar c’han hengounel skosad eo an Dr. Andrew Hunter a



Skol-Veur Heriot-Watt e Edimbourg, kelenour kan hengounel e Skol-Sonerezh Rouanel Bro-Skos).

Keñverioù hag heñvelderioù e prantad ar “folk revival” e Bro-Skos hag e Breizh da-heul an eil brezel bed. Komzet e vo getañ a-ziàr ar liammoù etre tud èl Polig Monjarret, Morris Blythman, Hamish Henderson pe Claudine Mazeas. Un digoradur a vo graet getañ diàr-benn dielloù broadel ar sonerezh hengounel skosad (Tobar an dualchais) dre skouerioù-son. Komzet e vo ivez getañ ag an dastumadenn kaniou Greig-Duncan (estroc’h evit 3700 kanenn hag o argemmoù dastummet e Biz Bro-Skos en 19vet kantved.

17 e. – Pierre Delignière (prezidant ar gevredigezh Bretagne-Écosse) :



Bro-Skos : àr-zu an dizalc’hidigezh ? Metoù politikel Bro-Skos. Dilerc’hoù ar Brexit. Ar votadeg evit dizalc’hidigezh Bro-Skos e miz Gwengolo 2014 en deus lakaet da drec’h an « Union » dre 55% a-enep 45% ag ar mouezhioù. Hervez lod e oa ar votadeg-se « votadeg boblek ur rummad ». Ha neoazh, e 2017, dizalc’hidigezh Bro-Skoz a zo er pennoù da vat, hag ur votadeg nevez a vehe aozet araoch an hañv 2019. Perak ha petra eo an abegoù evit kement-mañ ?

Merc’her 9 a viz Eost



15 e. – Béatrice Balti (skrivagnourez, istoerourez) : Istoer Bro-Skos : ag an annezidi kentañ betek ar brezelioù-dizalc’hidigezh. [Levrioù](#)

17 e. – Fañch Bihan-Gallic (MRes, MSc, doktorour e studioù keltiek, Skol-Veur Aberdeen).



Ar Gouezeleg-Skos en e metoù politikel, Istoerel ha sokial e deroù ar XXIvet kantved : Gouezeleg Bro-Skos a vez komzet hiriv an deiz get tro 60 000 a dud. Un elfenn pouezus-bras eo àr tiriad hag e sevenadur an Highlands. Abaoe ar Gaelic Language Scotland Act e 2005 emañ bet anavet ar yezh get ar vroad ha lakaet eo àr-wel get efedusted er vro. Get ar bedeladur hag ar c’hemmoù politikel vras a zo e-kerzh e rank ar gouezeleg en em azasaat. Ar ginnigadenn-mañ a ra an dro a stad a gouezeleg Bro-Skos en e gendestenn bolitikel, istorel ha social e penn-kentañ an XXIvet kantved.

Yaou 10 a viz Eost

15 e. – Béatrice Balti (skrivagnourez, istoerourez)

Arzoù ha hengoun Bro-Skos : un dro da zizoloñ elfennoù ispisial Bro-Skos a-fed lojeris, dilhad, sportoù ha c’hoarioù, arzoù...

17 e. – Roland Becker (Talabarder, sonour saksofon, kompozour ha klaskour)



« Joseph Mahé (1760-1831) dastumer kentañ ar sonerezh boblek e Breizh-Izel hag e Breizh-Uhel). N’eus ket ezhomm ken kinnig anezhañ, tudenn meur àr leurenn Breizh a-vremañ. Kenelgerzhoniour hag arzour àr un dro, paket eo atav get troioù-dastum ha sonadegoù. Dielfennet brav e vo neuze getañ oberenn ar chaloni Mahé, e-liamm get e vuhez dezhañ.

Gwener 11 a viz Eost

15 e. – Korantin Denis (Istoerour, Dazont ar Glad)



“Yann-Bêr Kalloc’h, ar stourm evit Breizh” (prezegenn-skeudennaoueg). Kant vlez ‘zo, e 1917, e varve unan ag ar varzhed brezhonegourion meur. Marvet pa oa eizh vlez àrn-ugent e emgannoù ar Somme... Ha chomet àr e lec’h e oberenn dalif, Ar an deulin, da hêr. Buhez verr Yann-Bêr Kalloc’h, lesanvet Bleimor, a zo bet eeun èl houarn ur c’hleze tonket d’ar stourm breizhat : difenn feiz ha yezh e dadoù. A-drugarez d’an dielloù dibar-mañ e ta sklaer stêr ar vuhez-se.

17 e. – Christophe Cérino (Ijinour ensklaskoù àr an istoer-mor, Skol-Veur Kreistez Breizh) , Pascal Le Floc’h (Économiste maritime, Université de Bretagne-occidentale), Yves-Marie Paulet (Biologiste marin, Université de Bretagne-occidentale)



« Pesketaerezh gwezharall hag hiriv an deiz, enkadennoù hag azasadennoù ».

E-pad sizhunvezh ar Gouel, e sal-degemer ar C’hambur Kenwerzh ha Greantelezh :

Diskouezhadeg “Gweledigezh – Vision”, Yann-Bêr Kalloc’h “Bleimor”
get

Monig Loosen-Baron

Skeudennet eo get Monig Loosen-Baron, kelennoerez àr an arzoù-plastek e Gwened, un ugent skrid bennak tenet ag “Ar an Deulin”. Deskrivet eo ennañ e enezenn, Breizh, e yezh, e feiz...

